


KANTIK SANT HERBOT



Var don: Breuriez ar Feiz.

DISKAN :

O sant Herbot benniget,
Aman, en ho chapel,
Davedoc'h omp diredet
Da c'houlen ho skoazel.
Goulennit bennoz Doue
D'comp oll ha d'hon tier,
Ha bennoz Doue ive
D'al lóned, d'ar c'hreier.

I

Eus Bro-Zaoz oa ginidik
An Otrou sant Herbot ;
E gerent, tud plavidik,
Oa ive tud devot.
Dre o c'henteliou santel
Ha skoueriou o buez
E lakejont o bugel
Var hent ar zantelez.

II

Ar Zant, en e yaouankiz,
A jomas pur bepred ;
N'en devoe nemet dispriz
'Vit follentez ar bed.
O na kaerra vertuziou
Dirazomp a vleunio,
Pa vo heuilhet e skoueriou
Gant tud yaouank hor bro!

III

Sklerijennet gant Doue,
Kennerzet gant e c'hras,
Sant Herbot zeu hep dale
En tu-man d'ar mor braz.
'Vit braza mad hon tadou
E teu var zonar Breiz ;
E gomzou, e vuzudou
A gresk enno ar feiz.

VII

Pa 'glev ar Zant goulennou
Great evit lóned mud,
Guelloc'h e klev pedennou
Great d'ezan 'vit an dud.
Sant Herbot, hon diouallit
Dreist oll diouz ar pec'hed.
Ha dre an dorn hor c'hasit
Da vro an eurusted.

IV^a

Demdost d'ar mor e vevas
Eur pennadik amzer,
Mes e vrud en em skignas,
Hag hen da janch karter.
Dont 'ra da guzet neuze
Aman kreiz eur c'hoat bras.
Bez 'eo aman, hep dale,
Brudetoc'h 'vit biskoas.

V

Tud klanv a zeu d'e lochen
Hag a zistro pare ;
Tud gwasket gant an anken
A gav peoc'h an ene.
Mestr ez eo var bep klenved
Ha mestr aberz Doue :
Outan e sent a lóned,
Memes al lóned goue.

VI

Gant Doue oll-c'halloudus
D'ar Zant eo bet miret.
E' c'halloud ken burzudus
Var an anevaled.
Setu perak e peder
Sant Herbot beniget
Evit pellât pep danger,
Pep drouk diouz al lóned.

J. B.

Imprimatur: die 7 Feb. 1912.

A. GADON, Vicaire général.